

STUMM AR GÊR, STUMM AR SPERED ?

« En penn-kentañ e oan bet lakaet en gaou gant an iliz-veur-se, pennoberenn a skañvder, esa diboell sevel gant greunvaen un uhelvennad dic'hallus. Abalamour d'an eurvezhioù hir am boa tremenet enni e oa deuet din an dic'houested pleustrel da vat. An diac'hinad (paradoks, mard eo gwell ganeoc'h) adeiladour-se en deus graet diouzhin un den sorc'hennus, diskibl da Dual, da Ildud ha da Gadog, en ur c'hantved n'eus mui tamm talvoudegezh gant kelennadurezh ar sent-hont. Pa c'h aen da Wengamp, kêr likoc'h, ma oa tud kar din eno eus ar renkad etre, e vezen anoazhet ha lakaet diaes. Eno n'em beze plijadur nemet gant ur paourkaezh matezh a lennen kontadennoù dezhi. Hiraezh am boa da returniñ d'am c'hozh kêr demer, gwasket gant hec'h iliz-veur, nemet e santed un enebiezh kreñv ouzh kement tra plat hag ordinal. En em gavout a raen me ma-unan, pa'm boa adwelet an tour uhel, an nev vegek, ar c'hloastr hag e vezioù eus ar pemzekvet kantved astennet ennañ ; ne oan em aes nemet pan vezen gant ar re varv, e-kichen ar varc'heien-se, an itronezed nobl-se, en o c'houk sioul, bep a levranez ouzh o dreid hag ur pezh flambev en o dorn. »

Skrivet gant René de Chateaubriand, paotr Komborn ? Ba, ba ! Komzoù Ernest Renan, evel-just. Ha n'eo ket kement-se diwar-benn kêr Landreger, met kentoc'h diwar-benn ar pezh a ra he c'halon, an dra gentañ a weler, a ranker gwelet : an iliz-veur, o tronañ en kreiz. Tour Hasting, an tour uhel pintet ha dantelezet, ar c'hloastr hag ar bezioù kozh, hag all. Nestig a selle outi evel ar moull m'eo bet stummet e spered, ha pa vije moull kontrol. Ni a oar re vat pegen pouezus eo an endro bugaleaj, an endro krennardiezh : ar pezh a weler, ar pezh a gred hon gwaskañ, pe ar pezh a gred lakaat hon speredoù da nijal gant hunvreoù. Manet Nestig gant gwel trellus an iliz-veur, ur gwel bamus hag en devoa aloubet tout e soñjoù ! Un dibab all, en devoa koulskoude, un dibab hag en dije moarvat stummet e spered heñvel, nemet ne oa ket un dibab sakr, mat da disakrañ ! En Landreger e oa kaeoù ma oa listri oute o tiskargañ marc'hadourezh, met ivez tud, tud gant o danevelloù, o gweledigezhioù deut eus ar broioù pell... Ar porzhioù zo dorioù dont tre ha dorioù kuitaat, a-wezhioù da vat.

Fez Nestig a vije aet kuit dre an dorioù-se ? Peñseet entre Pariz ha Louaneg, en Rozmapamon, kentoc'h.

Ha Jarl Priel eta ? Hon Jarlig hag a oa o tont eus ar bourk bihan e-kichen ? Kant tro ar bed en devoa graet bepred ! Ha mat eo bet dezhañ lakaat Landreger evel perzh en e romant « An Teirgwern Pembroke ». Bepred ar memes plijadur ouzh e lenn ! Diouzh a ouzon ne oa ket bet ken fromet gant an iliz-veur ! Komz diwar-benn an dud, ya. Tud vunut, tud paour, tud aet o spered gant an evned, hag all. Digarez da diskouez pegen pinvik e oa an hini a ouie kemer an traoù evel ma teuent, ha se daoust d'ar stard ma oa an traoù war ar pemdez. Leurreniñ ar fent... Harpañ ar bevañ.

Gwezhioù zo e oar ar skrivagnerien kemer harp war ar c'hêrioù hag o lakaat da ginkladur en o dezrevelloù, en o romantoù. Ul lodenn eus o ene, eus o spered, eus o istor, eus o memor ? Da lennerien « Nenn Jani » da lâret, evel da reoù « L'ancre de miséricorde », daou skrid disheñvel-mat lec'hiet kaer en Brest... Ha n'eo ket un digarez da lakaat an hiraezh da achapiñ kuit ? Hiraezh ur gêr bet, hiraezh lec'hioù bet en ur gêr ? Hiraezhiñ ha goveliañ ur memor leurrenet ?

« Ar glav a zivere a-hed dremm melen Lloyd's Bank, ar varc'hadourien-votoù o doa dastumet boteier a oa a-istribilh er-maez ha penn Chopin war ar skritell peget ouzh gwerenn stal Morgan & Higgs a oa melkoniusoc'h eget biskoazh, kemenn a rae e oa ur sonadeg er Brangwyn en noz-se. Pegañ a reas Yann e fri ouzh ar werenn, neuze e soñjas er skeudenn a roe eus an diabarzh gant e fri bras pladet war ar werenn c'hleb hag e savas e gein. Bamiñ a rae gant souezh ouzh notennoù forc'hek ha begek 'The Rhapsody in Blue', o sevel, o sevel, o pignat (ar c'horn-boud, garmiñ a rae du-hont etrezek an dokoù du) hag adarre e krogas e fri da sevel ha da ziskenn o vommañ ment kensonadeg Gershwin. Goude bezañ taolet ur sell war bladennoù ha levrioù ar stal-sonerezh ec'h adkrogas da bavata a-hed an tiez-kenwerzh. Ar glav dizehan a zistrempe ar gêr vras hag e votoù dilufr abaoe ar beure. » a skrive Ronan Huon, o kemer ar gêr, ar gêr vras, amañ Abertawe (Swansea) en Su Kembre, ur porzh all, evel unan bennak, ordinal gant he dremm, gant he livioù, he c'hwezh, he sonerezh.

Moulet eo ar gêr gant an dud. Ar boblañs eo he gwad. Ar glav, eñ, a lak personelezh al lec'hioù da lonkañ un istor n'eo ket dezhi, istor an dud o vevañ, o c'hoarzhin, o ouelañ, o tabutal, hag o vervel. Ha pa ne vije ket glav !

« Eus ar pemdez n'en deus ket c'hoant / Gant an dic'hoant ne ra ket forzh... » eme tremeniad Pêr-Jakez Heliass. Tremen, hep flastrañ e fri ouzh gwerennoù ar stalioù. Tremen, se eo an ober, se a lak ar gêr da vezañ.

Skrivagnerien all zo, na deuont ket eus kêrioù bras pe brasoc'h, na deus o moull kennebeut. Ur sell disheñvel war ar gêr avat ! Ur sell dic'hortoz... pe gortozet ?

« Un traou zo en tu all d'ar pont, skubet gant gouloù melen ar c'huzh-heol, gant pradoù o tiskenn hag, a-bep tu, skloturioù ar pantennoù serzh a-walc'h toket gant brouskoadoù stank. Ken digenvez, ken didud, ken didrouz evel un draouienn en koadoù an Ardenn » eme Julien Gracq pan gomz eus Traou ar Chezin, en Naoned. Stumm ur gêr, emezañ, stumm Naoned. Paotr ar maezioù, pe an Natur, kentoc'h, en devoa lakaet e lunedoù leun a gizidigezh war beg e fri. Dre al lagad-se e oa barrek da reiñ ur soñj dibar eus stumm ur gêr : Naoned. Naoned ar Goant, eme al lavar-pobl.

Herve Bihan

Levrlennadur

Ernest Renan, Souvenirs d'enfance et de jeunesse, Troisième édition, Calmann Lévy, Paris, 1883, pp. 7-8

Jarl Priel, An Teirgwern Pembroke, Al Liamm, Brest, 1959.

Roparz Hemon, Nenn Jani, Al Liamm, Brest, 1974.

Ronan Huon, An irin glas, Al Liamm, Brest, 1971, pp. 25-30

Pierre Mac Orlan, L'ancre de miséricorde, Edit. Jacques-Petit, Angers, 1947.

Julien Gracq, La forme d'une ville, José Corti, 1989.

Per-Jakez Heliass, An tremen-buhez, Emgleo Breiz, 1979, p. 78